

/AC'HANE/

1. An Amzer Grenn

Kiañ en doa graet ar priñs-marc'heg e-pad mizioù ha mizioù : diskennet e oa bet e-barzh traoñiennoù teñval ha rukunus, pignet e oa bet war runioù ha menezioù skornet gant an avel serzh, treuzet e oa bet gantañ dezerzhioù peurgrazet gant heolioù didruez ; kerzhet en doa bet hep tamm na lomm dre broioù pizh an dud enne ; ret e oa bet dezhañ c'hoari gant e gleze evit dic'houzougañ n'onn ket pet aerlin warn-ugent, gant e spered evit kavout penn d'ar c'hudennoù startañ ha gant e zivhar evit tec'hel kuit a-zirak kreñvoc'h enebourien egetañ ivez gwech ha gwech all.

Bez' e oa dirak dorojoù koad fetis ar C'hastell-Palez bremañ, a-benn ar fin : digor-frank e oant... Dic'hortosat tra ! Tud yaouank, war o dilhad houarn pe lêr, kleze ha gwareg gante, a oa o vont hag o tont, evel pa vijent bet o klask fred. Peotramant oc'h esa kas o c'hefridi da benn, tres an nec'hamant war o selloù mezevellet gant an aez ma oa bet gounit ar C'hastell-Palez...

Heuliañ a reas ar priñs-marc'heg ar braz eus ar yaouankizoù-se a oa oc'h antreal. Ur sal sklêrijennet a welent e penn an alez toet en tu all d'ar porzh-enor. Hag eñ, erru faezh o chom etre daou c'hoant, da vont en e goazez e-barzh ar sal.

Kadorioù goullo a oa c'hoazh met leun e vefe ar sal a-barzh pell. Ur plac'h bennak a zeuas hag a gemeras ar plasoù a vane. Unan anezhe a oa deuet dres dirak ar priñs-marc'heg. Ne wele nemet he fennad-blev hir a c'holoe he divskoaz hag un hanter eus he c'hein : glas-ruz e oa he stammenn ha rous-gell he blev. Krog e oa ar c'helenner da gelenn ; distanet e oa dezhañ bremañ goude ar c'haloupadenn en doe ranket ober, kuit a vezañ diwezhat : a-raok an tri c'hard eus ar c'hlasad e oa erruet evit gwir.

Serriñ e zaoulagad a reas e-pad ur c'hard munu-tenn evit klevet gwelloc'h ar frond a oa o sevel diwar he blev betek e fri, evel ur marc'heg tizhet gant un tenn. E sorc'henn e vefe bet kest ar garantez e-keñver ar plac'h-se. Ha c'hwitet e oa war e dro adarre, bac'het ma oa ar priñs-marc'heg dindan gazel-ge gant ur briñsez difiñv hag a drofe he c'hein outañ da virviken.

Ne oa nemet c'hwezek vloaz hanter, avat.

2. Ar Feiz

Ur c'harrdi izel a dreuze-eñ evit mont di. C'hwezh an dour-tan hag ur poulladig eoul-karr kozh e-kreiz al leur simant bet goloet gant bleud-heskenn ha kartoñsoù lous amañ-ahont. Un tamm jardin a oa en tu all d'ar c'harrdi, hanter strouezh, hanter legumaj, skalieroù mein hag a-benn ar fin, ti ar beleg Pilato.

Hag eñ yaouank, ha tres yaouank en e zoareoù, e save blaz al loued hag ar c'hozh diouzh e gomzoù avat. Pa veze o tisplegañ ar c'hatekiz dezhañ bepred. Re a c'houlennoù a veze o treiñ en e gokenn ivez. Da biv e oa ar wetur a veze e-barzh ar c'harrdi a-wechoù ? Ha ne oa ket kar a-bell ar beleg-mañ da Bilat kozh an aviel ? Perak n'en doa ket cheñchet anv ? Aezetaet e vije dezhañ en e labour ? Petra e oa e anv-badez ? Lavaret en doa dezhañ sur a-walc'h, met ankouaet en doa lipr, gant an abaf ma oa, gant an diaes ma oa lakaet gant ar c'helenn-se – ar feiz. Ne oa ket an dalc'h gouzout pe mat e oa krediñ e-barzh un dra bennak, pe get. Sur e oa, ken e oa, ne oa ket e-barzh ar pezh a gonte Pilato dezhañ e oa douget da grediñ tamm ebet.

Ne denne ket e iliz d'un iliz ivez. A-hed ur renkennad tiez e oa bet savet, e korn div ru strizh. Yen e oa e-barzh an iliz-se, hañv-c'hoañv. Plijus

e vije bet e miz Eost, nemet ne veze ket er gêr e-pad ar vakañsoù bras peurliesañ. Ne oa ket gwall gamarad gant ar baotred all : unan hag a boufe gant e renk-soudard e-barzh e skipailh skouted. “Chef” e oa, emezañ, hag eñ da dagañ gant al lorc’h o lakaat e genseurted da vezañ pont ha plan-kenn dindanañ.

Pilato, diouzh ma lavar ar gristenien, a oa ur paotr-deñved, hag int an oaned bihan da vezañ reizhet gantañ. Hegarat-tre e oa ar paotr, pep hini en deus e si...

Gwech-ha-gwech all e kave-eñ ur wetur e-barzh ar c’harrdi, neuze, hag e veze ret dezhañ hedañ anezhi a-dost evit treuziñ. Ur wech bennak zoken e oa serret hag alc’hweziet ar c’harrdi. Dre un nor all e veze kemennet dezhañ tremen neuze. Evel dont d’ul lec’h dianav dezhañ e oa se, ha ken dic’hortoz all kejañ gant Pilato dre ar penn all eus an ti.

Aet e oa ar beleg yaouank kuit goude un nebeud bloavezhioù, pell dioutañ, ha ken pell all, pelloc’h c’hoazh marteze, kement komz a oa bet distaget gantañ da genteliañ anezhañ e-pad ar bodadegoù e-barzh ar sal a-drek ar c’harrdi kozh hag ar jardin hanter fraost.

Biskoazh ne oa bet gwall gristen abaoe, a gave dezhañ.

3. **Ar Vamm-gozh**

Gris e oa deuet e vlev da vezañ. Ne gerzhe nemet a gammedoù berr, diasur, eus e ched d'e asied. Hag un deiz he doa remerket ne wele takenn ebet ken, ne gave ken e voued nemet a-bouez e fri. Kozh e oa he c'hi, ken kozh ha hi...

Pa oa savet, ur beure, e oa reut ar c'hi gant ar marv : difiñv ha yen e oa e gorf treut ha flaerius, en e gropoù, war an dorchenn bet gwriet ha kaeraet ganti evitañ.

Pa oa bet kaoz da brenañ ur c'hi all, he doa respontet krenn-ha-kras. Ne felle ket dezhi e vanje loen ebet war he lerc'h. En hec'h-unan e oa koulz dezhi tremen he bloavezhioù diwezhañ.

Erru e oa-hi skuizh. N'he doa ket gwelet ar paotr o tont, dre an tu-dreñv, evit tennañ he sac'h diganti. Stardet he doa anezhañ mort met egile a zalc'he da strapañ a-nerzh : aet e oa ar sac'h gantañ, a-benn ar fin, ha hi bet stlejet war ar riblenn. Piv en doa klevet he youc'hadenn ? Tud a oa en-dro dezhi bremañ. Gant piv e vije aet he c'hi ma vije bet aze ? N'en dije talvezet da vann ebet dezhi en em zifenn, forzh penaos ken buan all e vije bet tizhet ha gloazet e-pad ar gwalldaol-se zoken.

Pell e oa he sac'h-dorn, hag an nebeud bilhedoù ennañ da brenañ diankajoù.

C'hwezh staot a veze e korn dor he zi ; kreñvoch ha trenkoc'h e-kerzh an hañv. Ne baoueze ket al lonkerien da skarzhañ o c'hwezhigell aze, goude dont e-maez an ostaleri e korn ar ru.

Gwerzhet e oa bet an ti nesañ, stok ouzh he hini, da sevel unan nevez-flamm, pemp estaj dezhañ. Ur wech, pa oa o tourañ bokedoù en he zamm liorz, e oa bet tost dezhi bezañ friket lipr gant ur pezh maen-simant kouezhet diwar chafodoù ar chanter en estaj uhelañ. Tremenet e oa ar maen a-rez ha diskaret a-c'hwen he c'hein war an douar. Ur spou-ron, tudoù !

Trist e oa soñjal e oa bet hogozik lazhet en he liorz, hi hag a lavare alies e oa ken faezh all gant ar vuhez ! He liorz... Dek metrad karrez, peuzaloubet gant ur pezh gwezenn sperad-Sina ha na ouie ken petra ober gant ar frouezh bihan blevek deuet diwarni...

4. Ar Gasoni

N'o doa ket klasket krougañ anezhañ da vat evel-just. Dindan kef kozh dirusk ar wezenn-gaki e oa bet ret dezhañ menel difiñv etre o divrec'hioù, avat, tra ma oa daou anezhe o tremen ar skoulm-red. N'eus nemet ur c'hozh c'hwitous ac'hanout, a lavare unan anezhe, unan eus an daou vreur gevell o divskouarn diflapet hag o frioù mic'hiek.

Ur western e oa : ha mar n'errue ket an haroz, ur pezh paotr, barv dezhañ ouzh e c'hroñj hag un daoulagad glas-dislivet en e benn, dezhañ jestroù gorrek ha resis war un dro. Outañ c'hwezhoù peurdianav dezhe, goude ur varc'hekadenn diroll a-dreuz un dezerzh gor poultrennek : c'hwezh al lêr tomm, ar butun, an alkool ha kaoc'h-kezeg ?

Un dorn a oa prest da sachañ war ar gordenn.

Poaniañ a rae bep beure eus e damm buhez, pa zihune evit mougañ ennañ pep soñj a zrougiezh, pep doug d'ar feulster.

E-barzh ar polis e laboure unan eus ar c'hevelled a-benn bremañ, egile a oa aet gant o zad da zeskiñ ar vicher perukenner, e-barzh ur stal vihan war ar boulouard ; mont a rae o vot gant an tu dehoù pellañ hep re a boan-spered.

Ur maen a oa bet skoet e-barzh gwerenn o stal, ur wech, evel-se, eme an tad, war greiz an deiz, pa oa

o troc'hañ blev ur bugel zoken. Diouzh an noz, ne gredjent ket ober, re solut ar gael dir war gadranas...

Diouzh ur prenestr didantet e oa bet hopet un urzh skiltr bennak... Ha mestr ar vandenn, luc'hed en e selloù, en doa graet sin d'e re tec'hel kuit d'ar penn all eus an dachenn, diwar wel. Erru e oa stegn ar gordenn...

Biken ne vije distroet d'e gêr c'henidik, paneveti. Ur gamaradez a-gozh he doa c'hoant da welet.

Gortozet en doa bezañ e-barzh an tren, azezet-klok en he c'hichen, sioulaet dezhañ, alc'hweziet e groc'henoù-lagad, a-raok santout gwelloc'h an douster c'hwek hag ar frond diouzh he c'hostez.

Ha kontañ en doa graet dezhi adarre doare e yaouankiz eno ha hini an torkad frioù-lous eus e garter, o foelladennoù abred war o c'hoant da vagañ kaz ouzh an neb a oa dishañval dioute.

Hag aet ar gordenn da rord.

5. An Hañv

Jane ha John. Bemdez, koulz lavaret, e vezent gwelet o vale asambles dindan heol tomm-berv an endervezh. Deuet e oant da greisteiz Bro-Saoz d'ar memes skol-hañv da bleustriñ war ar piano bep beure. Re verr an amzer evit ober anaoudegezh don an eil gant egile, re hir evit chom evel kenseurted hepken. Ar wech kentañ he doa kroget Jane da gomz eus he dousig, ur paotr dimezet, oadet a zaou-ugent vloaz hag a skrive dezhi, e-barzh ar skol-hañv zoken, lizheroù leun a orged, hervezi. Selaou a rae John hep rannañ grik ; ne oa ket ar sonerezh ur blijadur hepken en e vuhez, un hent, a gave dezhañ bepred, da c'hallout sevel un deiz, marteze, e-barzh renkoù ar gevredigezh. Jane a blije dezhi danevelliñ hec'h istorioù karantez ha goulenn e ali digant John, ur paotr eus ar bobl ha na oa ket tres warnañ bezañ ganet d'ar Sadorn da noz goude krampouezh.

En noz all, e dibenn ar *party* aozet gant amezeien ar familh a loje anezhi, e kave dezhañ en doa damwelet Jane, en he gourvez war gwele ur gambr, o pokat gant foug d'ur c'hamarad d'an ozhac'h. Paotred koshoc'h a zedenn ac'hanout, a lavare-eñ an deiz war-lerc'h, kement hini a dremen hebiou dit ? N'on ket ur plac'h kollet nann, emezi, met mar